


[ 6 ]



## G U E R Z

VAR SUJET DAOU ZEN-YAOUANQ MASQET.

*Var an ton ancien.*

1.

**S**PERET - SANTEL, me ho suppli da réi sclerijen  
 d'am speret,  
 Evit disclèria un exempl a so pitoyabl meurbet,  
 Erruet gant daou zen yaouanq, a voa o daou o c'hevà  
 Ebars en un hostaliri da volarge diveza.

2.

Daou zen yaouanq a galite pere n'anvàn qet amàn,  
 A voa o daou o tebochi, siouas, et var ar bed-màn!  
 Na pa voant da veza mezo, ma zint en em goncluet  
 Da guemer ur vascaraden da vont en nos da redec.

3.

Possedete voaint o daou, siouas, gant an drouc-speret.  
 Ar c'henta croc'hen un eujen var e guein en deus laqet,  
 Hae eguile croc'hen ur gaor, na ma lerjont neuze:  
 Ni a so bremàn diaoulou da rentà brezel da Zoue.

[ 7 ]

4.

Mont a ra an daou zen yaouanq ebars en qêr da redet,  
 Hac unan demeus aneze en deveus bet rancontret  
 Eur bêleg pihini a zougue ar sacramant dereat bras,  
 Evit cas da eur paour qêz coz pihini a voa fall bras.

5.

Heuliet en deus ar sacramant hete ti ar paour qêz clàn,  
 En toul an nor e zeo bet chomet, ma neveys lavaret deàn  
 Me zo an diaoul, emeàn, a zo deut da dal da dy,  
 Hac en instant ma vi maro da eue a yel ganén.

6.

Ar paour qêz clàn en e voele en em laqa da voela,  
 Ar bêleg ous e gonsoli en deveus lavaret dezà :  
 Tavit, va mignon, emeàn, tavit ha ne voelit qet,  
 Unan eus ar vascaraden zo deut envoas d'o quelet.

7.

Ar bêleg ous en em distrei ous an den milliguet-màn,  
 Gant an hosti en e zaou zorn en deveus lavaret deàn :  
 Lam da vasq divar da visach, sete amàn da Zoue,  
 Ha gantàn te vo punisset qent ma vo varc'hoas an de.

8.

Hac én en em distrei neuse gant eur zellou arrogant,  
 Gant comzou vil ha disonest eus Jesus er sacramant :  
 Me zo un diaoul, emeàn, un enemi bras da Zone,  
 Hac a rento dean brezel qercouls en nos hac en de.

[ 8 ]

9.

P'en devoa laret e gomzou evel un den ar rajet,  
 Er meaz an ti neuse soudan var ar ru ê sortiet;  
 Mes pa yas en avis crial e sant e voad o yena,  
 Maro-mic ê, var ar pave, siouas, ê deut da goea.

10.

Eguile gant croc'hen ur gaôr dre ruyou qêr o redet,  
 A rancontras e gamarad na var ar ru gourveet;  
 Me zo re hardi, emean, va c'hamarad, da sponta;  
 Na c'heus bremâ nemet sevel, ha ni yelo da eva.

11.

Caer en devoa emân guervel e gamarad millignet,  
 E vasq a lam divar e visach o sonjal gouell e velet;  
 Mes pa velas e voa maro, e galon a so raunet,  
 Ma tolas eno ar c'hroc'hen, hac eus ar vro ê sortiet.

F I N.




---

F. Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.